

GWERZ EN MEULODI SANT VAUDEZ

Ton : *Elez euz ar baradoz*, pe eun ton all.

DISKAN :

*O sant Vaudez, hon patron, euz a lein an Nenvo,
Gand ho kalon a wir dad klevet hon goulenn,
Ha digaset adarre d'hoc'h holl bardonerien
An holl c'hraso deread e teuont da c'houlenn.*

D'am sikour, ô ma Doue, m'ho ped a-greiz kalon,
M'hellin, 'n eur gerik padaou freaz mad ha gwirion,
Lavaret da dud ma bro vertuzio sant Vaudez,
Skouer ar c'haera 'vit an holl hed-ha-hed e vuez.

Euz Iverzon ginidik ha bugel d'eur roue,
Maudez na vanke d'ezan nag enor na danve ;
Mes gloar hag holl vad ar bed a gave re dister,
Gant kalz a brez o lezaz 'vit heulia hon Zalver.

Maudez oa ar yaouanka euz a dek krouadur
Hag abred-mad e tiskaz beza eur bugel fur.
Pinvidik-braz, vertuzuz ha gand an holl karet,
Eun dimezi ar c'haera oe d'ezan kinniget.

An dud vraz ha gallouduz euz ar rouantelez
A glaske gonid ar zant gant pep seurt madelez ;
Mes poan gollet oe d'eze, ken stard oa e spered,
Hag en sonj ar prins yaouank n'oe biskoaz chom
[er bed.

Euz an Nenv e c'houlennaz, gand aon beza trec'het,
Ma teuje kenta-gwella, en e gorf, eur c'hlenved.
Ouz e beden kalonek Doue a zelaouaz
Hag eun drouk an euzusa d'ezan a digasaz.

E gerent a dav neuze... Hag ar zant d'ar studi ;
Hep dale-pell zant Vaudez zo trec'h da bep-hini.
Goude beza beleget, e lez e holl stado ;
Treuzet eo gant-an ar mor-ha deut eo en hon bro.

E vagik a douaraz en eskopti Treger.
Sant Tudal, eskop neuze, hen gra misioner.
Kenkent, da brezek ar fe, e vale dre ar vro,
En eur ^{hadin} ^{e peb lec'h} ~~implich~~, d'he ledan, komzo ha burzudo.

Digas a reaz bue d'eun den yaouank lazet
Gand e vreur, en eur c'hoari, siouaz ! hep evezded.
Ar zant ken karantezuz a bedaz evit-an,
Ha kenkent an den maro deuz bue enn-an.

E skiant, e zantelez hag e holl vertuzio
A glaske kuza d'an holl koulz hag e vuzudo.
Setu perag Sant Vaudez a dec'haz hep dale,
'Vit beva pell euz ar bed hag a-grenn da Zoue.

An holl a oe glac'haret... Ar zant a oa kuzet
En eul lann hir ha ledan nebeut darempredet.
Eno, dindan an tomder koulz hag ar ienien,
E tremene de ha noz oc'h ober pinijen.

Ne badaz ket pell e beuc'h : diskuliet oe souden ;
Gwelet rejeur adarre direded a vanden
E-leiz a dud gwel-gaset gant bep seurt klenvejo ;
Hag holl e kafent yec'hed dre nerz e bedenno.

Diez, allaz ! eo ar zant, o veza 'kresk e vrud,
An douar-braz a lezo, 'vit pellaat euz an dud.
Mont a ra 'n eun enezen, oa neuze gwall-riskluz ;
N'oa enn-i nemed aered ha kelien binimuz.

Pa glesker karout Doue, tizout ar zantelez,
E vever eaz en pep bro, dizaon ha dienkre.
Sant Vaudez, en enezen, gant Botmêl ha Tudi,
Daoust d'an holl amprevaned, 'a veve dizoursi.

En e garantez divent 'vit e zervijerien,
Doue ra tec'hout 'vit mad hag aered ha kelien ;
Ha douar an enezen brema zantelaet
En deuz, aboe keit amzer, eun nerz 'zo kaer meurbed.

Pelec'h 'ma 'n den a laro niver ar burzudo,
Niver an dud pareet euz pep seurt klenvejo ?
Ped tad ha mamm 'deuz kavet yec'hed d'o bugale,
O lakaat out-e douar euz enez sant Vaudez ?

Eun de e varvaz ar Zant, evel en doa bevet ;
E gorf gand e daou diskibl eno oe douaret.
E meur a lec'h 'zo kaset lod euz e relego,
'N e hano zo bet zavet e-leiz a chapello.

Laromp bennoz da Doue, ni Landebaeroniz,
Mil trugarez d'hon zud koz, 'deuz savet hon iliz,
He savet da zant Vaudez, evit hen enori !
En iliz hon zant Patron, pegen mad eo pedi !

C'hoaz en deuz dirag Doue galloud an amzer goz ;
E beden raio disken war-n-omp holl peb bennoz,
Mar goulennomp da genta, a-greiz hon c'halono,
Evel-t-an karout Doue, epad hon holl deizio.

Bepred, evel hon Patron, zentomp mad ouz Doue ;
Izel-izel a galon, en holl vad hon buez,
Distag euz holl dreo ar bed, reizet mad en pep tra,
Pellaomp euz a bep drouk ha karomp hon nesa.

Neuze, karet gant Doue, karet gand hon Patron,
Zûr, ni danfao souden ar mado gwirion ;
Hag evuruz, en Nenvo, hed ar beurbadelez,
Ni gano : *Gloar da Zoue ha Gloar da zant Vaudez !*

Evel-se bezet great !

IMPRIMATUR :

Brioci, die 1^a Julii 1881.

P.-M. FRANCE, vic. gén.